
KANTIK SANT VINOC

Patron Plouhinec

Ton : GUIR VUGALE AR VERC'HEZ.

Diskan :

O sant Vinoc benniget,
Ganet e Breiz-Izel,
Hor selaouit, ni ho ped,
Ha roit d'eomp ho skoazel,
Hirio, varc'hoaz, da jamez
Renit ho pugale,
Ma c'hellint euz ho parrez
Mont d'ho meuli d'an Ee !

1.

Euz lignez ar Rouanez,
C'houi 'dlie kaout eun tron,
N'e ket henor ha danvez
A c'houlen ho kalon,
Ho tenzor eo ar vertuz,
Ho nerz, ar feiz kristen,
Ho mestr a vezo Jezuz
Evit karet peb den.

2.

E bro Flandre o peuz bevet,
 Skeduz a zantelez,
 E kær Bergue o peuz skuillet
 Ho prassa madelez,
 Ha divar lein an envou
 E par c'hoaz ho pennoz,
 Gant eleiz a vurzudou,
 Var Franç an hanter-noz.

3.

N'ezuz forz, n'oc'h ket dizonjet
 Gant tud a Vreiz-Izel,
 C'houi 'zo ganthro kemeret
 'Vit ho fatron santel,
 Ama zoken en hor bro,
 Tostik da Veg ar Raz,
 Eur bobl a zoug oc'h hano,
 Deoc'h eo bet a viskoaz.

4.

En oc'h iliz Plouhinec
 E ma kaër ho skeuden,
 Ha dirazhi kalounec
 Ni 'gass deoc'h hor peden,
 Ho pedi hag ho karet
 'Zo bet hor c'hoant ato,
 Ganeomp-holl c'houi 'vo pedet
 Betek heur ar maro.

5.

Kaout lod euz ho relegou,
 Oh ! na pebez tenzor !
 Eun eienen a c'hrasou
 Evidomp 'zo digor :
 Pa z'oc'h bet bete-vrema
 Ouzomp trugarezuz,
 C'houi 'ranko neuze beza
 Muioc'h madelezuz.

6.

Eur bugel, a ioa küezet
 Var he benn en dour braz,
 Ganeoc'h a zo bet tennet
 Heb kaout na drouk na glaz :
 Martolodet an Arvor
 'Vez aliez en danjer,
 Diouallit e kreiz ar mor
 Ho bagig ken dister.

7.

Goall-stard e vez al labour
 D'an den divar ar mæz,
 Astennit dezhān sikour,
 Hag he labour 'vo æz :
 Guelet oc'h o labourât,
 Eun æl en ho kichen,
 Bezik an æl da skanyât
 He boan hag he c'hüezen.

8.

Guechall dezhan c'houi 'roë,
 Diouz m'oa red hag ezomm,
 An amzer a c'houlenne,
 Glao puill, koulz hag heol tomm,
 Breman ive, 'vel guechall,
 Pa vezo goulenet,
 Digassit d'eomp kement-all,
 Ho nerz n'e ket berreet.

9.

Grit d'eomp-holl en em garet
 Evit mad hon ene,
 Grit ma vezimp unanet
 Oc'h heul lezeñ Doué :
 Gant ho yez, ar brezounec,
 Harpit ganeomp ar feiz,
 Evuruz ha galloudec
 Dreizho 'vo bepret Breiz.

10.

O tad meurbet henoret,
 Ho korf santel, er bez,
 Diouz an tan 'zo bet miret
 Gant daouarn an Elez,
 Diouz tan ar goall-ïoulou
 Deut ive d'hon diouall,
 Ha mirit hor c'halonou
 Da Jezuz er bed-all !

IMPRIMATUR :

Quimper, le 26 Juin 1900,

Ém. FLÉITER, Vic. gén.

Kemper, monlet e ti DE KERANGAL.